



## DA ZOUDARDET CÔZ NAPOLEON,

*Pere a zanto o c'halonou o tridal gant eur joa dener,  
o c'houzout e zear da guerc'hat Relegou an Harros da  
enezen Santez-Helena, tri mil léo a Franç, e pelec'h e  
zeo bet chommet captif epad c'hoec'h vloas, qent mervel,  
hac a zeu anfin da veza digasset da entéri da Baris,  
e pelec'h e vezò savet dezàn eur bez caër meurbet.*

*Var ton : Canomp adare, va brofs, victoriou Napoleon.*

**D**IREDIT, Bretonet vaillant; diredit gant hast amâ,  
Da zelaou comzeus eur c'hélou ho peurgargo eus a joa:  
E zear da guerc'hat relegou ar güir sqüer eus ar vaillanc  
Evit donet d'o entéri en Paris, capital Franç.

Louis-Philip, hon Roue mad, leun demeus a vadelez,  
Soignus bras da gresqi bepret ar gloar er Rouantelez,  
A ordren d'ar Prinç a Joinvil, e vab, Prinç leun a galon,  
Monet da Santez-Helena da guerc'hat Napoleon.

Qerqent vel ma zeus gouennen diouzar Sozon en renta,  
O deveus consantet diouc'h-tu gant eur joa eus ar vrassa.  
Qementse zo eur merq certen demeus ar güir union  
A rën, a drugare Doue, entre an diou nation.

Ar Gouarnamant en deveus en e furnes decidet  
Ma vezo ebars en Ilis Hotel an Invalidet  
Entéret corf Napoleon, etouez e harroset cōs,  
A vev c'hoas eno, o tepord monet d'an ên da repos.

En Hotel an Invalidet eus eur joa eston meurbet,  
O sònjal o d'o an enor da zont souden da velet  
Deposi corf an Harros bras etouezo, brezellerien,  
O d'oa goechal d'o Impalaer grêt eus o'hourach preuyen.

An duc cōs Conegliano a zantas eur joa quer vrás,  
M'en em sònje bars er moment yaouanqêt a drégont vloas.  
Oh ! emezo oll, bremâ eo certen contant hor c'halon,  
Pa deu da repos en hor c'breiz hon harros Napoleon.

Tri den demeus a renq huel gant ar Princ a ya bremâ  
D'ambarqi var eur fregaden evit Santez-Helena :  
Ar general Bertrand, Las-Cas, députet a Finister,  
Neuze ar general Petit, mignon cōs d'an Impaler.

Na eljet qetober güel choas : Bertrand evel güir vignon,  
A heuillas a volontez vad en exil Napoleon ;  
Tad Las-Cas en d'oe an enor da veza eno ive,  
Petit a recevas adieu Napoleon d'e arme.

Mes mont a rayo ouspen ze gante var ar fregaden,  
Mignonet cōs Napoleon, diana eun tri c'hant den.  
Rouanes Franc, leun a respet evit ar Religion,  
A gass eur bêleg da zivoal relegou Napoleon.

Rentet e Santez-Helena, e voe grêt ér vatimant,  
Ganteur soign demeus ar vrassa, ractal eur chapel ardant,  
E pehini voe depositet relegou Napoleon,  
Test da bere voa daoulinet ministr ar Religion.

An Impalaer Napoleon en devoa eur c'hoant esqis  
Ma elje e gorf paour eun deiz repos er guær a Baris.  
Cetu-ta , goude nontec vloas m'en deus e ene rentet,  
E teuer da accomplissa ar pez en d'oa goulenet.

Hac én zo bet biscoas er bed eun harros qer burzodus,  
Adalec e stereden vad betec e fin maleürus ?  
Hanyomp amâ , en e enor , an oll poentchou principal  
Demeus e vuez burzodus hac en oll dreist-ordinal.

Ganeter bemzec a vis eost , mil sez-cant nao tri-uguent,  
Ne voa c'hoas nemet eur buguel ma voe er servich qerqent.  
Er blos trizec ha tri-uguent voa dijá chef escadron ;  
Ha da bêvar blos varnuguent ec'h assieje Toulon.

Ar bloavez goude voe hanvet commandant artilleri ,  
D'an oad a bemp blos varnuguent , eus an arme'n Itali ;  
Tri blos goude general chef demeus ar memes arme ,  
Hac en trivac'h ha tri-uguent an Egypt a gonqere.

Hanvetqenta consula Franç' l'an oadeusa drêgontvloas ,  
Ar blos goude e Marengo e c'honit eur vataill vras.  
Austerlitz , Iena , Friedland , Eylau , zo testou certen  
Demeus a c'haloud burzodus Impalaer ar Francisien.

E Waterloo , e mil eiz cant pemzec , an drivac'h even ,  
Endo a c'hoec'h vloashadaou-uguent pa vlangâsestereden ,  
Forcet , dre ar circonstançou , en em rentas d'ar Zozon  
E guis adversour generus , franc ha leal ha güirion .

Mes ractal gante voe casset tri vil léo demeus ar Franç ,  
D'un enezen horrubl meurbet , elec'h m'oé hep esperanç :  
Enezen Santez-Helena , e pini voe prisonnier  
Epad c'hoec'h vloas , qen a deuas Doue d'achui e vizer .

Nontee vloas zo ta eo maro en enezen horrubl-ze ,  
Pelli deus ar Franç , abandonet en un draonien drist ene ;  
Mes , hep dale vo demp rentet , en dezir vras pepini ,  
Hac e chommo da virviqen en hor c'hereiz da reposi .

En pad r  n e gaptivite , en devoe evit jolier  
An infam Soz Sir Hudson-Low, execrabl d'ar bed antier :  
An den vil-ze a dourmant Napoleon bep instant,  
Dre bep seurt act a dirantis , dre m'o a eno oll buissant.

Anfin, qement en deveus gr  t oc'h argars Napoleon ,  
M'en deveus ellet dont abenn da gontanti e galon :  
An Impalaer br  vet oll dre an nerz eus e boanniou ,  
Zo quer f  zet na ell mui stourm ouz qement a dourmanchou.

Ebars en andret horrubl-se en deus rentet e ene ,  
Goude qement a drubuillou , entre daouarn e Zoue.  
Er bemp mis mae, bloa mil eiz cant unan varnuguenteno  
E receo e sacramantchou , hep nep aon eus ar maro.

Endrode  n, leun a zaelou, voa Bertrand ha Montholon ,  
Daou general , o d'oa heuillet en exil Napoleon ;  
An autrou abat Vignali , var an douar daoulinet ,  
A bede Doue a galon vit an Harros decedet.

Qerqent e zeus bet e vousqet eus e habit coronal ,  
Eus e gordon a legion , hac e gleze general ,  
Pini a zougue e Wagram , e Drest, Moscou, Montmirail ,  
En Austerlitz ha lec'hiou all , vel trec'hour en peb bataill.

Eur grucifi a voe poset neuze var greiz e beultrin ,  
Vit ma vije tost d'e galon imach e Grouer divin .  
Oll ganonniou an enezen na heanent da denna  
Evit annonci voa maro brassa harros ar bed-m  .

Tri arched a voe gr  t neuze da receo e relegou :  
Unan plom, unan houarn-g  enn, hac un all en accajou .  
En hini plom e voe laqet gant e oll accoutrament ,  
Hac e galon voe dastumet ebars en eur voest arc'hant.

An oll Sozon ha Francisien voa ebars an enezen  
A heuille cors Napoleon, coulz hac an estranjourien .  
An eiz a v  e ent  ret en eun draonien a garrie  
Da visita , en e yec'het, yel plac a drangilite ,

Repos en peoc'h, ô Harros bras ! en ascre eus a Zoue,  
Obtenet ec'h eus da vennat demeus abers hon Roue.  
Goulen a rejout reposi var riblou rivier Paris,  
En creiz pobl Franç, evit receeo oll sicouriou an Ilis.

En amzer horrupl hac impi eus ar revolution,  
E voa serret an ilisou, ne voa nep Religion :  
Napoleon a éruas, a c'halvas ar vêleyen,  
Hac a laqas da rën en Franç güir lezen ar gristenien.

Ne alfemp biqen niveri an nombr eus e victoriou ;  
An Europ oll a voe test mat voe mestr var an oll vroyou.  
Laqat eure brô gaer ar Franç ar c'henta var lein argloar,  
Dre e vaillantis burzudus, e furnes hac e bouvoar.

Qementse a dle hon douguen da gaout dioutân memor ;  
En voa brassa harros ar bed, commandi rô d'ar victor.  
Enor ha gloar ra vo rentet en peb brô d'e relegou ,  
Ha ra vevo da virviqen e memor en oll vroyou.

C'houi pere oc'h eus bet goechal arboneur hac an enor  
Da veza gant Napoleon cunduet oll d'ar victor ,  
Requetit oll digant Doue, demeus a fonç ho calon ,  
Da receeo en e varados an trec'hour Napoleon.

Ne hanvimp nemet eur Breiziad etouez qenlies hini  
O deus grêt preuen a gourach dirac faç an enemi :  
La Tour-d'Auvergn, a Guerahès, da bini vo prestsavet  
Eur statu gaer er c'hamp-batailler guær ma zeo bet ganet.

Soudardet Breis ! mar bez unde ret dic'houina hocleze,  
Bet memor en Napoleon, ho sello demeus an êe.  
Ar zònch-se hepken ho talc'ho bepret en hent an enor :  
Bet dignataodiouz ho tud cös paguerzent oll d'ar victor.

FIN.



## ENTERRAMANT AN IMPALAER NAPOLEON,

AR 15 EUS A VIS QERZU 1840.

Var ton : Sonjit, den abuset, sonjit en eternite !

PETRA a glèvàn-me ?... Perac an tennou canon ?...

Hac éru eo en Franc Relegou Napoleon !...

— Ia, an eiz a vis Dù, en Cherbourg éruet,  
Hac en eul lestr a vapeur prest int bet transbordeut.

Adalec qær Cherbourg, hac a bep tu eus ar Sén  
Eo bordet ar riblou a zoudardet ancien ;  
Eur bobl niverus meurbet gant hast a ziredas  
Vit saludi'r Relegou a Napoleon bras.

Ar bemzec a Guerzu, Paris oll a voa er za,  
Vit ellout contempli an arrest eus ar brassa.

Ar bobl a zired en foul, gant glac'har, da velet  
Relegou Napoleon, brassa harros voe bet.

Qerqent ha goulou-deiz e clévet dre ar ruyou  
Oc'h ober ar rappel, tambourinou, trompillou ;  
Un heur goude n'em gavas ar gard national,  
Troupiou var droad ha var varc'h a éruas ractal.

Da zeg heur e zoat oll rassamblet var ar blacen,  
Hac e tiambarejot an Impalaer souden :  
Placet voe qerqent gant pomp eno neuze ractal  
Gant calz a solemnité er char imperial.

An autrou Arc'hescop, coulz hac an oll vêleyen,  
Gant devotion vras o devus grêt ar beden ;  
Qerqent corf an Impalaer gant respect zo douguet  
Gant ar zoudardet vaillant hac ar vartolodet.

An autoriteou , eur c'haon bras en o c'halon ,  
A heuille gant respect Relegou Napoleon ,  
An Deputeet , ar Pared , an oll Generalet ,  
Ar Prefetet , ar Mériou , o c'halon glac'haret.

Oll rejimantchou Franç o devoa bet deputet  
Certen nombr eus o zud , vit m'o dije asistet :  
An Aumonier a voa ét da Santez-Helena  
A voa en penn ar c'hortech en eur stat an trista.

An autrou'r Prinç Joinvil voa gant e etat-major ,  
Ar Marechalet Franç voa er plaçou a enor .  
Ar char voa oll alaouret , ha goal gaer decoret  
A zrapoyou gonezet var an enemiet .

C'hoezeç marc'h du a voa demeus ar char amaret ;  
Eus a dapissou aour e voant caparaçonet :  
Anfin , biscoas ne veljot en nep brô gant eston  
Qer caer vel Enterramant hor bras Napoleon .

An Ägl imperial , an drapoyou tricolor ,  
A zisquèle d'an oll e commandjont d'ar victor .  
Anfin , da un heur anter e zeo bet éruet  
Ar c'horf dirac an Hotel eus an Invalidet .

An Arc'hescop en deus bet commancet an ofic ,  
Hac ar c'horf zo diouc'h-tu antreet bars en ilis .  
En violet voa güisqet eno ar vèleyen ,  
Evel en Rom da ofic demeus ar verzerrien .

Ellout rér assuri penos james nep christen  
Pere a voa eno n'arconac'hant birviqen  
Trêjou caer Napoleon ebars en e archet ,  
En e uniform caera , vel pa vije cousqet .

Ar Prinç eus a Joinvil en deus presantet neuze  
Corf an Impalaer gant respect bras d'ar Roue ,  
En eur lavarat déan , a galon contristet ,  
Ar c'homzou-mâ gant glac'har hac en daelou beuzet :

« Sir , presanti rân déc'h amâ corf Napoleon.... »  
Ar Roue a respont , an encres en e galon ,  
Gant eur vouez majestus hac eun nobl assuranç :  
« En receo a rân ouzoc'h en hano eus ar Franç . »

Ar Marechal còs Soult a zalc'he eun oriller  
Var bini voa poset cleze an Impalaer ;  
Ar general Bertrand voa carguet gant ar Roue  
Da laqat var ar vascaon an immortel cleze.

Ret voa beza eno evit güelet an daelou  
A scuill soudardet còs, o sònjal er victoriou  
A c'honezjont, cunduet gant Napoleon-Vras ,  
Pini neo mui diraze 'met relegou , sivoas !

Eun devez all aroc e voe güelet gant eston  
Daoulinet , o pedi , ouz arched Napoleon ,  
Ar marechal Soult, stouët , mantret gant ar glac'har ,  
E benn entre e zaouarn , casi stoc d'an douar .

Eur music ar c'haera , mes dre donniou truezus ,  
A scòe ar galon , ha mouzeiou melodius ,  
A gane gant majeste *Requiem , Kyrie :*  
Ar galonou a fraille oll d'an *Dies iræ*.

An ilis oll endro a voa meurbet decoret  
A dapisseri zei gant o franchou alaouret ,  
Hac en creiz an Templ divin e velet ar vascaon  
Goarnisset oll a vercou truezus an anaon .

Disqennet eo er bez Napoleon da vijen ,  
Evel m'en d'oa c'hoantët , er capital Franç christen :  
Etouez an Invalidet e gorf paour a repos ;  
E ene , gant graç Doue , a zo er Barados .

Bremà , ni , Francisién , n'hon eus nemet pedennou  
D'adressi da Zoue , en eur stouat hor pennou ,  
Evit hon Impalaer gant an dud a Ilis :  
Lavaromp a greiz calon , *Pater , De profundis* .

FIN.